



KINNIG LABOUR

Stummer-ez DABU Donaat « Natur ha Kamping »

Adalek an 29 a viz Even betek ar 4 a viz Gouere 2026

An UBAPAR, Unvaniezh Breizh evit Diorren ar Buheziñ war ar maez, a zo ur rouedad kevredigezhioù e Breizh hag a gas war-raok ar buheziñ ha diorren an tiriadoù war ar maez.

E penn ur rouedad 40 kevredigezh bennak emañ. Labourat a ra war meur a dachenn : an deskadurezh d'an endro, an dudi brezhonek-gallaouek, an niverel hag ar meziantoù dieub, ar vugaleaj hag ar yaouankizoù.

Lidet he deus an UBAPAR he 40 bloaz e 2024. Un aozadur-stummañ gant al label Qualiopi eo. Un aotre da ginnig stummadurioù DABU-DARE e Breizh hon eus. Skoazellet omp gant strollegezhioù hag ensavadurioù.

Stag oc'h eus an deskadurezh pobl ? Bet oc'h bet rener pe renerez ur gevredigezh ? Anavezout a rit bed an ekonomiezh sokial ha kengret ? Anavezout a rit bed ar stummadurioù micherel hag ar stummadurioù DABU ha DARE ? Plijet e vefec'h o labourat en ur rouedad ?

Degemer mat en UBAPAR !

→ PETRA EO HO KEFRIDIOU ?

Bezañ stummer-ez DABU :

A-raok ar stummadur DABU

- Eskemm gant rener-ez ar staj
- **Kemer perzh en devezh prientiñ a-gevred gant peurrest ar skipailh stummañ** : Un devezh a vo raktreset evit labourat asambles hervez ho prantadoù vak. Skrivañ ur raktres pedagogel e liamm gant raktres desevel an UBAPAR.
- Labourat gant ar skipailh pedagogel war al lec'h devezh a-raok devezh kentañ ar staj. Echuiñ ar program ha prientiñ mat an devezhioù kentañ. Prientiñ an dafar, an degemer, mont d'ober kefridioù ma vez ezhomm. Aozañ ha kinklañ al lec'h, dizoloiñ an tro-war-droioù,

E-pad ar stummadur : Bezañ kiriek eus aozadur ar staj

- Buheziñ prantadoù pedagogel, teorikel ha pleustrek. Lakaat ar stajidi da vuheziñ.
- Kemer e karg an aozadur : predoù, bod, merañ an amzer, an treuzdougen, ar c'henweturioù...
- Bezañ gouest da dapout intrudu, da ginnig traoù.
- Ambroug ha priziañ ar stajidi.
- Bezañ war al lec'h noz ha deiz gant ar stajidi.
- Kemer e karg surentez korf ha surentez spered ar strollad.
- Bezañ e-karg deus ar minored ha bezañ aketusoc'h diouto.

Goude ar staj : klozañ

- Kemer e karg kempenn al lec'h ha bezañ aketus da adlakaat pep tra evel ma oa.
- Kemer perzh e skridaozañ priziadur ar stajidi.
- Chom e liamm gant ar skipailh pedagogel ha gant kenurzhierz an UBAPAR betek ma vefe diskoulmet an darvoudoù, ma vez lod.
- Treuzkas ar fotoioù tapet e-pad ar staj d'an UBAPAR (poltriji eus ar stajidi o defe sinet an aotre nemetken). Implij a raimp anezho evit ar c'hehentiñ hollek. Arabat skignañ ar fotoioù e-maez ar staj (zoken e-touezh

hoc'h eskemmoù personel !)

→ DOARE-DEN

Bezañ brezhoneger-ez a-feson (komz, lenn ha skrivañ) : Ar stummadur a vo kaset e brezhoneg penn-da-benn.

Kaout skiant-prenet e bed ar buheziñ (kreizennoù dudi, kampoù vakañsoù)

Bezañ mennet da dreuskas.

Bezañ gouest da labourat e skipailh.

→ DIPLOMOU

DABU (BAFA) klok pe un diplom kevatal.

→ DOAREOU-LABOUR

Kevrad CEE 60€/kriz dre zevezh.

1 devezh prientiñ gopret a-raok ar stummadur

Frejoù-hent restaoliet

Lakaat ho anv (lizher-mennañ ha CV)
da gas dre bostel da dudi-laizi@ubapar.bzh adalek bremañ betek an 21 a viz Ebrel 2026.

Ezhomm da gaout muioc'h a ditouroù ?
Pellgomzit da Awena Le Baron-Courtet e karg eus ar stummadurioù DABU-DARE : 06.43.90.75.93